

CHANSON NEVE,

Composec gant ar Chloarec, evit disqueuz ar vantr-calon en eus sautel eus a zemezi e Vestrez.

Var ton : Malgré toute la tendresse.

Pebes qélou, ô, va Doué,
A meus hirie recevet !
Va mestrezic, va c'harante,
A glevàm so demezet ;
Va mestrezic, va c'harante ;
An ini garrien muia,
Ha pa sonjau en quementse,
Va c'halon a ven ranna.



Oï blijadurou an natur
A so echu evidon :
Echu e zé ar blijadur
A davee va c'halon ;
Echu é ar gontantamant
Am boa ebars er bed-mân :
Foëi d'an aour ha foëi d'an arc'hant,
E nep guis n'o dezir'an.

Hn89

C
407/A

— 2 —

Me a garfe caout ur matier
 A guement a ve cāpabl
 Da renta va c'halon seder,
 Da sec'hi va daoulagad,
 Da rejouissa va c'halon,
 Da gontanti va speret,
 D'am lemel a affliction
 Ha da rei din ar yec'het.

Mes quementse so incredabl,
 Ha ne arruo biqen;
 Me so ar muia miserabl
 Eus an ol grouadurien,
 A meus collet en un istant
 Ar fronez eus a bemp blaves,
 En un gol va c'hontantamant,
 Va flijadur, va mestrez.

Adieu eta, pares Pliestin!
 Adieu tud a gonseqanç,
 Me a meus cavet va chagrin
 Emesq ho rejouissanç;
 Me mens ho c'heuillet gant douster,
 Me ho quita gant glac'har,
 Henvel demens un durzunel
 A ve privet eus e far.

C'houi hoc'h eus grêt va flijadur,
 Va joa, va c'hontantamant;

— 5 —

C'houi a ra va displijadur,
 Va anquen , va nec'hamant ;
 Emesq ar ros a ambrassen
 Ha va ol delection
 Me a meus cavet un drezen
 Hac a biq calz va c'halon.

Mes bremân me gred en guirion
 Rêson an dud babilla ,
 Penos e c'heller caout poëson
 Emesq ar suc an doussa ;
 Ha dindan ar fleuriou caëra
 Afies e ve coachet
 Aspicou ar re gruella ,
 Aëret-guiber, serpantet.

Rac se eta , me ho supli ,
 Ia , dre ma ho caran ,
 Na dent james da reposi
 Elec'h ma vefet bravân ;
 Rac ma c'héru enep goaleur
 Da ober déc'h diblassa ,
 E vezò tristoc'h ho malheur
 Ha diessoc'h da usa.

Evit test eus ar guementse ,
 Va breudeur , va c'hoarezet ,
 C'houi pere am anaveze ,
 Noc'h eus met don d'am guelet ,

— 4 —

Ha pa velfot ar chenchamant
 Pini a so deut ennoir
 C'hoñi a brouvo certenamant
 E zê touchet va c'halon.

Diaroq me a voa envel
 Eus ur rozen florissant ;
 Va c'halonic bepret seder,
 Carquet a goutantamant :
 Ar joa pintet var va diou chot,
 Va daoulagad qer laouen,
 Ma sonjen, dre ma voan diot,
 N'am bije glac'har bigen.

Hoguen, ma em goelfec'h bremàn
 Ebars em daelou beuzet,
 Choui lavarfe : ne qet emàn
 Hor boamp-nî amavezet ;
 Ennes a voa gyô:a galou ;
 Emàn a so contristet,
 Ennes a voa un den mignon,
 Hac emàn sur n'en deo qet.

Allas ! eo sur, va mignonet,
 Me so ar memes ini,
 Mes biscoas ne gavis sujet
 Voe capabl d'am glac'hari ;
 Bremàn me meus cavet unan
 Hac a c'hlac'har va c'halon !

— 5 —

Ha p'o po clêvet anean,
Ec'h estonfot gant réson.

*Pa voan me ebars em jardin
O contempli va fleuriou ,
Va c'halon , exant a chagrin ,
Va daoulagad a zaëlou ,
Ha me clêvet un alc'hoëder
A us ya fen o cana :
Ad studium te confer (1),
Nam nupta est amica.*

*Ha me o vouet d'am godelet ,
O tenna va fistolen ,
Hac ho tiscar an alc'hoëder
D'an traon demeus ar vezen .
Ra gollo velse o bue
Qement en deo ar galon
Da zonet da anonç din-me
Ar sort desolation.*

Mes p'e glêvit-u quement-màn
A c'hinou ur messajer ,
Otramant , clêvet anean
Eus a veg un alc'hoeder ,
Oblijet on het d'e glêvet

(1) - Dalavaret ê , en em ro d'ar studi , da vestrez so
demezet.

— 6 —

*Elsars em vrassa glac'haw ,
Ha setu aze ar sujet
Ma tesiràn an douar.*

*Neus mui a gonsolation
Evidon bars er bed-mâ ,
Neus nemet desolatiou,
Tourmauchou ar re vrassa
A ve reservet evidon
Goude bea re garet ,
Mes me vo furroeñ ða vijen
Ha ne garin den ebet.*

*P'am eus fraillet ar chadennou
Gant pere oan amaret ,
Pa mens bruzunet al lassou
Gant pere voan liamet ;
Pa è demezet va mestres ,
Me guemero an habft ,
Ha me ne vezàn recoles ,
Certen me a vo hermit.*

*Mes gouscoude , p'en em sonjân
Ha pa rân reflexion ,
Ur recoles a ranq goela
Ha derc'hel trist e galou ;
Un hermit beva retîret
Hac ep nep plijadures ,
Qcment-se ol so re galet :
Ret è din c'heas ur vestrez.*

— 7 —

*Mes pelec'h caont ur guir vestrez ?
 Ar bed-màn a so malin ,
 N'am eus qei etom danseres ,
 Nac unan a garo guin ;
 Diaroq me voa difficil ,
 Mes bremàn pa on trumpet
 Me a vezo muioch'h subtil
 Pa gonyversin gant merc'het.*

*Mes anaout ràn ur femeleu
 So dign a attantion ,
 Onnes a vo da virviqen
 Rouanes eus va c'halon ;
 En onnes e mân va fianç ,
 Onnes é va c'harante ,
 Enni emàn va esperanç ;
 Hi è sourcen va bué.*

*Evelse un den glac'haret ,
 Evit en em gonsoli
 A dle alies lavaret
 Da basseal e anui :
 Mar deo serret an or-se ,
 Unan al a zigoro ,
 Me a vo bepret er sonj se ,
 Ha a vo betec ar maro.*

*Ma tesirfac'h , va mignonet
 Gout hano ar c'homposer*

— 8 —

*Guinidic é a Locquirec,
Map ena d'ur guiañer,
A so n'em laquet er studi
Bars er guér a Vontroulez.,
Hac a zo bremian disoureti ,
P'è demezet e vestrez.*

*Evit soulaji ar c'haner ,
M'o supli , assistantet ,
Da rei dezän pep a ziner
Evit eva d'hō yec'het ,
Otramant , prenit ar chausou ,
Pinai he deus ar pouar
Da rejouissa ar galon
A greis ma ve eu glac'har .*

